

« Gwerz ar Roue Gradlon ha Ker-Is »

Moderato



I

Pelan 'zo neve e kear Is
Ma ze ken foll ar iaouankis ?
M'ar klevan-me ar binion,
Ar vombard hag an delennou ?

N'euz e kear Is netra neve,
Ann ebatioù ma ve bennde,
N'eus e kear Is nemet traou koz,
Ann ebatioù ma ve bennoz.

Bejennou drez zo divoannet
Ha dor ann ilizou preñnet,
Ha war ar beorien o wela
Ech hasser ar chas dro drañla.

D'ho c'hoezek vlaann oll varc'het
N'ho deuz doue, met ar pec'het
Ha da ober he gurunen,
E roont ho c'haera rozen.

Ahès merc'h ar Roue Gralon,
Tann an ifern enn he c'haron,
Er penn kenta deuz ann dirol,
A gas d'he c'heul ar gear da goll.

Sant Gwenole, gant kalonad,
Zo bet meur vech o kaout he zad,
Ha gant daelou ann den Doue,
Enn deuz lavaret d'ar Roue :

— « Gralon, Gralon, laka evez
« D'ann dizonoù a ren Ahès,
« Rag tremenet vo ann amzer
« Pa skuillo Doue he goler.

« El lec'h ma voa c'hoarsadek kent
« E vo neuze skriagnadek dent,
« El lec'h ma voa kanaouennou
« E vo neuze skrijadennou ...

Hag ar Roue koz spouronet,
He varc'h hen evez kelennet;
Mez distaret dre ar gozni,
N'euz mui an nerz da stourm outi.

Ha, skuitz gant rebechoù e zad,
Evit mont deuz he zaoulagad,
Hi 'deuz gret gant droug speréjou,
Eur palès kaer tost d'ar skitjou.

Eno, gant he amoufouchen,
E ma lennoz ann obaden,
Eno, enn aour hag er perles,
Evel ann heol e par Ahès...

II

— « Plijadur dec'h er palès-man,
« Merc'hed gentil a poured skan,
« Plijadur dec'h ha nozvez gren
« Erme eur prinz enn eur entrenn,
« Ar prinz a zouge dillad ru,
« He varo a voa hir a du,
« Hag he izili a verve,
« Hag he zaoulagad a zeve.

— « Ra viot deut mad, estrajoer,
« Erme Ahès gant eur beg flour ;
« Ia, ra viot deut d'ar gwella,
« Mac'h n'hañvet ann traou falla.

— « Neuze m'em bo digemer mad,
« A respontas ann divroad ;
« Rag me ar fall zo ken disket
« Hag ann hini neuze en krouet ...

A kerkent Ahès d'er pedi,
Da ober eun dro zanz gant'hi,
Hag ann oll, a eneb Doue,
Gwassa ma c'hallent a doue.

Pa voa d'ann obaden-ze fin,
Dansez Ahès, en eur c'hoarzin,
Hag enn eur evel he zion skoù,
A ...

« Kerc'hit din-me deus a gear Is,
« Veseillou santel ann iliz
« Kerc'hit kribas ar c'hrussufiet
« Eun hosti sakr, hag e velfet !

Le Petit

War ar men-ze, hon tadou koz,
A skuill e goad d'eun Doue foz,
Hag ar Roue, e ber amzer,
A lavaras d'he vignon ker :

— « Du hont, e memor a gear Is,
« Me zavo d'ar feiz eun iliz,
« Rag evit testiñ d'ann oll
« M'he galvo iliz Remengol (1),

« Rag war dolen ru Denatès
« Me lakat da ren ar Werc'hez,
« Ha beb bloas, enn enor d'ar groas,
« E rin ober eur pardon braz.

« Eno, ann oll dud afflijet,
« A gavo d'ho foanriou remed,
« Ha silvidigez d'ho ene,
« Dre c'hroz Mari gwir vamm Doue.

« Pa vo ann Doueou maro,
« Ha koët meur a goat dero,
« Eun de, deuz ar pevar avel,
« E tevio d'hi pobl Breiz-Izel.

Neuze ma ve sonj a Gralon,
E vo lavaret a galon :
— « Bras ar burzudou a zo bet
« Ebars ann amzer dremenet ...


(1) Le commencement de cette
Gwerz, se trouve dans notre numéro
du 16 janvier 1927.

non mentionné au
649 OLLIVIER

KANIRI BREIZ-IZEL

« Gwerz ar Roue Gradlon ha Ker-Is (1) »

Moderato



III

Pa oa fin d'ar sakrilejou,
Messenger ann droug speréjou,
Choniet e unan er palès,
A dostez da gaout Ahès.

— Va dousik koant, merc'h da
C'hralon

Hag ar roue koz trubuillet,
E mez e vele zo zaillet,
« Din-me, din-me, va marc'h prima
« Siouas peurgollet ar ger-ma ...

Ha war e varc'h e ber amzer
E kerz da heul e vignon ker,
Ha war o jerc'h, enn eur ludal,
E klavas ar mae o rual

Le Pet

Ahès, a respontas timad :
— « Kavet vint enn iliz va zad,
« Rag va zal diot-ren a gred
« Enn trombler-ze a Nazareth ...

Tri a redas e ber amzer,
Hag a ziskaras ann Aoler,
Hag an traoù zakr a we douget
Eiro o digouarn mulliget.

Ar Prinz ru, raktal n'he gwelas,
A greis he galon a c'hoarzañ,
Hag a lavaras c'hoas enn hann :
— « Plijadur dec'h er palès-man !

Da genta a daolbou boutou,
E vrinunas ar veseillou,
Goude flastras ar grussif,
Hag e krenchas war ann hosti ...

A wac-n'he, gant oll e noaz,
En eur gana, « Malloz d'ar groaz !
A raz e seiz stum dishevel,
Dansez ar seiz pec'het marvel ...

Kerkent ne palès a grenas,
Hag ar c'hurunou a strakas,
Hag a drez ho zellou pec'het,
E skoas tan gloz al hec'het.

— « Na c'hoñt vel, eme ar Prinz ru
« Me laka Doue war e du...
« Ma lavaret oll gant giae'har.

« Gwerz ar Roue Gralon ha Ker Is ⁽¹⁾ »

Moderato



Pe-tra zo ne-ve e kear Is Mez e ken foll ar ia-ouan-kis

Me kle-vann me ar bi-ni-du^{es} Ar vom-bard haq ann te-len-nou

III

Pa oa fin d'ar sakrilejou,
Messenger ann droug sperejou,
Chomet e unan er palès,
A dosteaz da gaout Ahès.

— Va dousik koant, merc'h da
C'hralon

- Ha mui a karet va c'halon,
- Ha n'helfent me ket eneb gis
- Guelet alc'houe skingon Ker Is

— « Va zad a zoug enn e gerc'hen
« An alc'houe aour deuz eur chaden
« Ha va zad breman zo kousket,
« Ha aout ann alc'houe n'hallan ket

Mes hen d'he zreid en em strinkas
Ha d'he dornik flour a bokaz,
Hag e dallas dre he zellou,
Karget a dan hag a zaélou.

IV

Heb goud ar pez a dremene,
Neuze eur pennad ac'hane,
Enn e balès ar Roue koz,
E voa kousket e kreiz ann noz.

Kambr paour Gralon ne oa enn-hi
Netra nemel eur grussifi
Deuet a zorn eur mignon ker,
Sant Kaourintin, Eskop Kemper.

Netra nemet eun Aviel,
Roët gant eur manac'h zantel,
Roët dez-han gant Gwenole,
Evel eur merk a garante.

Kaer enn e gozni vel eun Æl,
E kouske Roue Breiz Izel,
Hag enn dro de dall, e vleo gwen,
A re, dispak, eur gurunen.

Neuze, Ahès, ar brinsez fall,
Evel pa vije skoët dall,
Enn e gambr, heb aon rag Doue
A deu da laères an alc'houe.

Enn eur vale war beg e zroad,
Ar verc'h a dosta skan d'he zad,
A goustadik deuz e gerc'hen,
A denn n'eur c'hoarzin, ar chaden.

V

Piou a deu du-hont gant ar ru,
Pignet war eun hinkane du,
Hag hen d'an daoulam war ar gein
Ken a strink an tan deuz ar vein?

Hennes eo messaler Doue,
Digaset enn Is d'ar Roue,
Hennez eo Abostol ar Feiz,
Sant Gwenole, karet e Breiz.

Tostât 'ra en eur c'haloupad
En he zorn deo e vaz abad,
Hag eur stol aour war he zaë venn,
Hag eur c'helc'h tan en dro d'ebenn.

Setu hen e dor ar palès
E p'hmil e kousk tad Ahès
Diwar e varc'h an den zantel,
A c'halv, en noz a vouez uhel.

— « Gralon, Gralon, sao hep dale,
« Sao evit heuilla Gwenole,
« Sao evit tec'hel deuz ar mör,
Skingou kear Is a zo digor |

Hag ar roue koz trubuillet,
E mez e vele zo zaillet,
« Din-me, din-me, va marc'h prima
« Siouas peurgollet ar ger-ma !...

Ha war e varc'h e ber amzer
E kerz da heul e vignon ker,
Ha war o lerc'h, enn eur ludal,
E klevont ar mör o ruial.

Neuze ar brinsez dirollet,
He amouez gani-hi kollet,
Dre ead Is, e zell hag a zao,
A rede, dispaket e bleo

Pa glevas daou lamp ar c'hezek
Araog ar mör e tiredek,
Dre al luc'het gant nec'hamant,
Hanveaz e zad hag ar zant.

— « Va rad ! va zad ! mar em c'harit,
« War o marc'h skan va c'homezit
Hag, he respont, an tad tener
A zav e verc'h war an tailler.

Kerkent ar mör a vuanna,
Ha Gwenole en eur grenn,
A gri : « Gralon, tol ann diaoul-ze
« Diwar dailler da hinkane !...

Koulskoude c'hoas leun a ankres,
Ann tad a zalc'h ar bec'heréz,
Mez ar zant a ra zin ar groas
Hag a stok outi penn he vaz.

Kerkent, mestres an droug speret
A ruil er mör bras fuloret,
Hag e kleo tost ar Roue koz
Eur c'hoarzin skiltr e kreiz ann noz.

Mes, rented skanvoc'h heb dale
E sail prim da c'heul Gwenole,
Hag e varc'h, gleb e beder c'har,
A lamp deus ar mör en douar.

Breman ed e Mari-Morgan,
Ahès, deuz skeud al loar a gan,
A gan hag en eur vous'hoarzin,
A grib er mör he bleo bezin.

VI

Da zao heol ar zant ha Gralon,
A bigne war lein Mene-Höm,
P'hmil, he dreid ebars enn trez,
Zao he ben war Douarnenez.

Ac'hane Roue Breiz-Izel,
War e lerc'h a dolaz eur zel :
Mez, el lerc'h Is, gant he deg dor,
Ne velas mui nemet ar mör.

— « Eur gear em boa deus ar gaëra,
« — Ha setu hi eet da netra !... »
Hag e galon oll a fraillas,
Hag he zaoulagad a velas.

— Gralon, Gralon me Gwenole,
— Gralon, d'an daoulin ganen me,
Ha Gralon dindan e c'blac'har,
A goë d'ann daoulin d'ann douar.

Hag eno, dispak e vleo gwenn,
Hag e dall pleget er boultron
A lavaras c'hoas ar Roue :
— Ra vo gret bolonte Doue !...

Pa zavas diwar he zaoulin,
Dindan tan-flamm heol ar mintin,
A velas, a dreuz he zaélou
E lugerni Ru-Men-Goulou.